

« POBL VREIZH »

B.P. 304

29273 BREST-CEDEX

Koumanantoù

Boutin : 10 lur

Skoazell : adaleg 20 lur

C.C.P. 2746-79 Rennes

C'HWEVRER 1976


NIV 73

1 LUR

POBL VREIZH

KUIT DA GAOUD KEUZ GOUDE ...

VOTIT



UDB O VONT D'AR BOTADEGOU-KANTON

Petra zo kaos en em lakomp da soursial eus ar botadegoù-se ?

E gwirionez, n'eus netra da c'hortos digant ar C'huzul Jeneral, hag a zo evel ur paour-kaezh den dinerzhed a-grenn. Piv a gaver e-barzh ar C'huzul-se ? Juloded eus an tu dehoù e-leizh, tud na fichont ket hag a vir ouzh kement tra a chañch, tud bet aet e-barzh aes-tre, dre m'eo bet lodennet braw ewite ar c'hantonioù ; talloud a ra muioch'h, hag eus un tamm mat, ar c'hantonioù a-ziv-ar-maes ewid na ra re ar c'herioù ; tud ar c'hentou, n'eo ket gwial-aes dont a-benn anehe, 'mechañs !

N'eus netra da c'hortos digant ar gorsailherien jeneral : gant ar prefed e vez bodet ar re-mañ dindannañ e c'homont ; hennezh eo ar mest, war roll an traoù 'vo diskudet diwar o fenn da skwer ; hennezh eo an heni a gass kelou, aketus, d'ar gouarnamant hag a ressev urzhioù digantañ, heñvel ouzh ur mweñ lusantus...

Ma ! Mont a ray UDB koulskoude, d'ar botadegoù-kanton N'eo ket e kredfemp e c'heller saveteñ Breizh gant botadegoù ! Med ar pezh a fell deomp eo e vefe klevet hor mouezh, e-pad an amzer ma vez an dud troet o spered ganite tremas ar politik muioch'h ewid boas. Peurlañ ez eo bet lakat an dud da soñjal e oa ar politik un dra vil, un dra lous. Bet zo bet gwelet tud bet deuet c'hoant dehe d'ober-politik, an ur vont da votiñ just a-walc'h. Ha n'hellomp ket, evel-just, lezel al leurenn gant ar re all, gant enebourien pobl Vreizh an allsañ : gant ar botadegoù e kavomp an tu d'ober bruderezh ha da vezañ gwelloc'h anavezet.

Setu e lako UDB tud war ar renk ! Ewid diskouez gant ar bis ar juloded-se emma Breizh war he zremenn abalamour dehe. Juloded en em sillet etre labourerien Vreizh ha pennoù bras ar gouarnamant hag o viroù oute a vezañ klevet gant ar re-mañ ; juloded o lakad pe o lezel pennoù bras Paris d'ober, a vloaz da vloaz, promessaou newez dalc'hmad ; juloded o klask tennañ, korvo (profit) eus hon diaestenoù ; juloded o vevañ braw diwar goust ar re yaouank dilabour, ar besanted sarmet gant an die, ar besketarrien na gavont ket sav d'o feasket, diwar goust ur vro o koll he gwad muioch'h-mui bemdez. Ar juloded-se, e vo red, pelloc'h, sevel o zreid dehe !

Lakaad a ray UDB tud war ar renk ! Ewid roñ da c'houde (régionalisation) Giscard, ewid roñ da c'houde e fell dehi gwelloc'h diskar ar brefeded, ewid embarn eus un hent all red mont gantañ, ewid kennig ur politikerezh all, disezet war ar ted m'eo graet François gant poblu disheñvel, hag ez eo red leusket pel unan anehe da ren hec'h aferioù hec'h-unan.

Mont a ray war ar renk :

e Lanvon	Loig KERVOAS
e Brest	Fañch MORVANNOU
e Uhelgoad	Mari-Elen MELOU
e Montroules	Andrew KORNET
e Roazon	Yff ROUGER
e Gwenn-Rann	Aldrig RUSSON
e Naoned	Alan TASSEL
en Aire	Per AR GRILL
er Faoued	Erwan EVENOU

A-boues bras-meurbet e vo kement mouezh roet d'ar re-mañ, dre ma tiskouezo ez eus da gudennoù Breizh un diskoum breizh ha sossialist, ha d'an eil tro neuse, e votimp hag e pedimp da votiñ ewid ar c'handidat eus an tu kleiz aet war e hanv ar muiañ a vouezhoù, pe UDB, pe PC, pe PS, pe PSU !



MILIARDOU DA ZASTUM WAR GEIN AL LABOURERIEIN

Toud n'dud a vez ez eus ur pont braw o tremas drest ar Ster-Liger etre Sant-Nazer ha Sant-Brewen. Ur labour dispar a ro lorc'h d'ar vicherourien. Met a-dreñv saverien ar pont e kavomp ur vandennoù veviz hag o deus kempeteriet an traoù ewid gounit kalz a wenneien. E-barzh ar « Société d'Economie Mixte » ez eus 4 strollad, en o zoues ur bank (Banque de Saaz). Kenniget o deus un « sempleur » d'ar C'huzul-departamant dre hanterouiezh CAMOUS, ar prefed. Un dro-louam eo kentoc'h. Sellit amañ petra he deus bet ar « Sossietez ».

Ur prest a 500 milion a lurioù kozh e-pad 10 vloaz heb kampi (heb interest) ! An droad da greskiñ pris ar pont p'o do c'hoant lerruet eo da 26 miliard : div wech muioch' goude 5 bloavezh !

An soñt da vezañ ar mistri war gusul-merañ (C.A.) ar « Sossietez ». Graet o deus evel-se ar pris paseet ar pont ha roet o deus 7 dre gant d'an akisionerien ha netra d'an departamant.

An tu da c'houi arc'hant adarre diouzh kuzul an departamant ma'z eus koll Skozezioù-arc'hant ewid netra 1500 milion peti bloaz e-pad ar 5 bloaz kentañ ha 400 milion ewid netra peti bloaz e-pad 20 vloaz.



Piv a baos gant e impolioù (tailloù) ? Al labourerien drest-oll. E-pad ar mare-se kusulioù-kêr o kass labourerien da SANT-NAZER dre ar pont, o deus kredet reiñ ur skozell-argant ewite. Paest e vo dre an tailloù. Ar gouarnamant na sampo netra diwar goust ar pont met ressev a ra 5 miliard a d-T.V.A. ... Ur vezh !

Kalz a dud a gomaris da santout c'hwec'h ar akrap war o chañ. Heugl int. Galvet gand ar sindikadoù, deut int da ziskouez o c'houarn. Kusulioù-kêr zo a nac'h kontinañ d'ober ar saout-bezh ha kusulieren-departamant stag ouzh ar P. S. o deus roet o dilas eus C.A. (kusul-merañ) an S.E.M.

Div wech muioch' a dud a dreus ar Ster-vras eged arrog ar pont, hervez ar Prefed ; se ne vir ket ouzh ar kapitalisted da lakad pet tremas da denañ etre 36 ha 46 lur diouzh a sakodoù. Marc'hatmatoc'h e vo ewid al labourer med ouzhpenn etre 100 pe 200 lur en do peb mis da zispign. Hervez hon eus klaved, ar kapitalisted o deus gounezet 3 gwech pris ar pont e OLERON. War an hent mad int, neketa ?

HAG A-NEVEZ EI-DRO DIMP ?

MOR BIHAN EN ALRE : disonjet en deus...

Peb bloaz e vez pedet an dud a-boues da eved ur banne, gant an Aotrou Maer. Ur gwinn-a-enora evel ma vez laret e galle. Un dra vad eo.

Ar bloaz-mañ pedet eo bet an Aotrou Person. Just eo : nombrus ar gristenion er barres. Pedet ivez renerion ar skolioù-stad ha re ar skolioù-kristen, renerion an administrasionoù, mistri an jañfarmed hag all. Nen domp ket a-eneb.

Pedet ivez daou zen ewid komz en hanv ar govneranted. Unan ne vefe ket awalc'h ?

Pedet ivez daou noter, ha renerion ar bankoù. Parag notered ? Parag gouarnamant an Arc'hant ? An dud-se a dalv muioch' eged ar vecherion ? Ewidoc'h, Aotrou Maer, un toer ne dalv ket un noter ? Ewidoc'h, sur, ne ra ket, rag edoñt-efet 'peus pedit ouzh ho taol renerion ar sindikadoù a zo e penn kantadoù ha kantadoù a vecherion.

Er mod-se, Aotrou Maer, diskouezet ho peus ur wech ouzhpenn pere a vez ewidoc'h an dud a dali ; ar pennoù bras, ar re binwidig, ar re galkoudus.

Ar re all a c'hortozo. A c'hortozo ur maer all marse.

BRESEL KUZH E SAHARA AR C'HORNOG

Setu ur bobl vihan o sevel en he sav ewid difenn he frankis hag he Bro : ar bobl sahouril.

N'eus ket pell e oa ar vro-mañ un drevedenn (ur c'holon) dindan gollod Bro-Spagn. Newez zo, dre ma oa soñt Bro-Spagn diubiñ Sahara ar C'hornog e-neus klasket Hassan II aloubiñ ar vro. Savet e-neus ur gerzhadeg vour bet hanwet ar « gerzhadeg c'hlas ». Ur bern tud o-deus baleet ewite war du an dezirzh. Hogen, n'eo ket tapet gante mont betek penn dre ma'z eo savet a-eneb dezre Bro Algeria ha drest-oll ar bobl vihan a vev e Sahara ar C'hornog, kantreerien, magerien loened aneze, distant en ur vro divent.

Parag kement a vec'h ewid un dezirzh ? Abalamour drest-oll d'ar men-gleuzioù fosfat c'hoantaet gant ar Vorkaned hag ar Vorkanianed.

Ar Saharanoù n'o deus ket c'hoant ken da vezañ renet gant an estren ha setu emaint o klask en em zifenn daoust ma n'int ket nevers ha ma n'eo ket aes ober bresel ha drest-oll bresel kuzh en un dezirzh. Harpet int en o stourm gant an Algerianed padal emma gouarnamant Paris, ataw a-eneb ar poblu bihan, a-du gant ar Vorkaned. Diskouezet a ra an afer-mañ penaos n'eo ket aes d'ur bobl vihan bezañ

mestr er gër evel ki en e groc'hen. Sparfili a beb sort a nij dre ar bed prest da daol o c'hrabanou war ar re-vihan pa glaskont sevel o choùk.

BLAS AR GWAD GANT AN ARC'HANT

Ur c'hoarvez eus an dibab ez eo korfivers an armoù ewid ar gouarnamant gall. Er bloavezh 1974, ez eus bat gwerzhet teir gwech muioch' a armoù ewid er bloavezh 1970. Hag set eo an afer war gresk adarre, aboue. Tremen ugent miliard a zo bet rastellet ewite. Derc'hel a ra Bro C'hall he renk goude ar Stadoù Unanet hag an U.R.S.S. 270 000 a dud a labour en usinoù armoù, en o-zoues 60 000 ewid ar gwerzhez a-zivases.

Peb heni a gav mad an traoù ewid n'emaint, den ne lavar netra pe ken

HA KASSET HO PEUS HO KWESTELL D'AN TRAON ?



Chañs hon eus gant ar filmoù gall ; goude « Digor an abadenn... » (« Que la fête commence ») : ha piv en dije kredet e oa Marv Pont-kalleig un istor ken fentus !, e teu bremañ war hor skrammoù : « Gwestell Pont-Aven » (« Les Galettes de Pont-Aven »).

Ur ger a gemenn koulskoude : gwelloc'h e vo deoc'h chom er gër mar deo Kisidik ho stomok. Bez' ez eus arvestoù a zo awalc'h da lakad ac'hanooc'h da ziskouez ho kwestell. N'ez eus nemed ur plac'h a zo dilhad gis-kozh ganti hag a gomz brezhoneg. Divint peseurt micher a ra ? Kosañ micher er bed, eweljust : en em werzhan a ra d'an douziet. Ha petra a ra ar botted e-kelt-se ? N'eo ket diassoc'h ar respont ; tremen a reont o amzer e-barzh an tavarrioù. Person Pont-Aven a ev e vane kenkoulz, ha pa zegouez deñañ soñt d'aoas an abadenn ewid tud ar barres, petra a gav deoc'h e vo lakad war ar roll ? Ur biniaouer benag marteze pe ur strollad

korollerien ? sonioù Alan Stivell pe Gilles Servat ? N'emaoc'h ket tost ; n'ez eus nemed Théodore Botrel en deus savet sonioù e Breizh, an holl dud a oar kement-se. Ne vez ket diskouezet peseurt labour a ra paotred Pont-Aven, pa ne bledont ket gant ar vevision. Ewid ar pezh a sell ouzh ar marc'had, pa n'emaint ket o tiskouez o revr da Jean-Pierre Marielle (an hini eo a c'hoari roll Pont-kalleig er film « Que la fête commence »), n'o deus netra d'ober nemed aoasñ gwelloc'h e-barzh an ostaliou pe fritañ silg war an draezhennoù e-pad an hañv, ewid an douziet eweljust. Yac'h eo filmoù seurt-se ewiteoc'h : ne c'hallef ket bezañ diskouezet naotoc'h ha skiaeroc'h eged enno gwr emzalc'h an drevedennourien.

Reun ar C'halian

PENNAD-KAOS

GANT

TUD PLOUGRAS

(Kendalc'h)

J. GWASDOUE : an Aotrou Maer, hag e wreg
F. KERE : eilvaer
P. LIRZIN ha J. ROLLAND : kusulierien parres

Pa oa bet klevet e veze dalc'het kusul parres Plougras e brezhoneg, e oa set Pobl Vreizh d, da doullañ kaos gant tud ar barres ewid gôd hiroc'h diwar-benn o buhez pemdez, o micherioù, o c'hudennoù hag o diasterioù. Un degemer deus an dibab a oa bet gret deomp, un degemer a-barzh tud hag a oar c'hoazh petra eo bewañ.

POBL VREIZH — Ha petra sonjes
eus an hadlodennañ pe ar remañbemañ ?
Hag ar freuzhañ kleuzioù ha traou evelse ?
N'eo ket memestra toud, med erfin...

Y.G. — An eil zo stag eus egile
peogwir 'benn vo gret an hadlodennañ,
evel a lares, a-benn neuse vo fregret ar
c'heuzioù. Da zigerenti toud n'omp ket
'barzh ur vro lech zo ezomz da fregañ
kement-se a gleuzioù. Hemez eo ma
opinion. Martese François Kere, ase, en eus
un opinion dishevel deus ma heni... med
me a sonj din ar remañbemañ 'n em rai
e-un awalc'h. N'eo ket red mont da zaspig
kalz a arcliant d'ober anezhañ. Peogwir me
well 'barzh Plougras amañ, kasimant
kement feurm zo arri toud ez eus arri staget
un pe diw all diout war al lech zo bet
chomet tud c'hoazh. Ha bremañ a-benn
dou pe dri bloaz amañ, pe bemp pe
c'hwec'h vloaz ivez, e rankomp kaoud
nebeutoc'h a dud ewid n'hon eus bremañ
c'hoazh, peogwir ar re youank a c'ha kuit
toud deus an douar, betek amañ bepred,
setu me sonj din, ar feurmioù a c'ha da
greskiñ c'hoazh. E vo gret feurmioù bras,
sariset, met me sonj din a-four ober ur
feurm bras, eo ar remañbemañ zo c'h
ober ivez e-unan. N'eo ket red mont da
basañ anezhañ. Rag ma vez red paeañ tud all
d'ober ar remañbemañ, a zo ur benn frêjoù
da gentañ war ar barres hag an dud toud
peogwir, pe vez touchet d'e feurm, pe vez
ket, e rank an den paeñ memestra. Hag ar
remañbemañ a favoris ar re o deus kalz

dija, ar re o deus bet gallet prenañ douar
partout 'barzh kement korn zo toud eus ar
barres, an douar n'houl den ebed aneze, an
heni en do arcliant a brenno ar re-se. Ha pa
vo gret ar remañbemañ, me n'houl
dioutan e mod ebed, med ma vo gret un
dewezh, an hen en eus prenet douar
du-mañ, du-hont, a vo dastumet e re dazañ
un tamm hag a c'ha da gaoud douar hag a
divez martese ur milion, mod-kozh,
kweda, ur milion ha daou zewezh-arad
dioute, hag a vo roet daou zewezh-arad
dize ewid ul lod douar hag en nevo paeet
kant mil lur an daou zewezh-arad. Ha se
n'eo ket just.

Hag un dra zo c'hoazh injustoc'h a-se.
E-barzh Plougras, pa oa gret ar c'hadast
newez eo bet ped den o klastañ e zour pe
diskutñ gant ar c'hontrolour ewid ma vefe
gret e-barzh al lech e oa sariset da vezañ
gret bepred, e vez gret ur gomision
a-newez neuse, ha honnez a hadklass an
douar, a ro un dalvoudegezh deze, ha se zo
injust, ma zo paeet diwar an douar gant ar
berc'henned ha gant al lokatourien diouz
ur c'hounidegezh 'zo, me sonj din vezer
sariset da vioud hemez da hadpartañ an
douar goude. Peogwir eo ar re 'h em
gondañ an digourdant, o deus klastet an
douar an isellañ-toud, abalamour da baeañ
nebeud diwama. Hag an deiz a vefe gret
ar remañbemañ, int a lakete o re-barzh ar
gwellañ toud, abalamour da gaoud muioc'h

a boenchoù, hag o dije muioc'h a zour
neuse c'hoazh ewid ar re all. Hag an dra-se
n'eo ket just tamm ebet. Peb heni vez
sariset d'ober gant e re, mod en eus laket
aneze. Neuse zo moien d'ober un dra
bernaket vad. Hag ar remañbemañ a vije
bet gret velloc'h, ma vije bet laaket peb
heni lib da cheñch park gant e anezeg. Ha
e vije bet gwelloc'h marc'had d'an dud
toud. Ha ma oar awalc'h, ar barres a
c'hounez douar oc'h ober ar remañbemañ
peogwir kement kozh hent, kement kozh
tra e zo toud; pa vez fregret toud an traoù,
a vez laket a surfass (goreard) da beb heni,
setu gant ar barres e chomfe douar. Med ar
barres n'eo ket sariset da vezañ en kistion.

AR FALZ

kelaouenn drimizieg an Emzao
diazezet gant Yann Sohier
boded ennañ skolaerien ha kelennerien
Vreizh
a-du gant eur skol vreizeg ha laik gwirion
Lennik Ar Falz ! Komzant d'ar Falz !
(20 lur ewid 6 nivrezenn)
AR FALZ, stred Ka-a-ar-Gwez
29245 Plourin-Mortroulez
C.C.P. 430-20 H Roazon

P.V. — Ha c'hoazh neuse, F. Kere,
petra sonjes eus an remañbemañ ?

F.K. — C'hoazh douar-me zo proupet
a-pa-z'eb eus, fregret toud n'eo ket mad d'ober.
Cheñche-se kement-se a draoù.

P.V. — Doust hag-efi zo parresioù
tro-wa-dro e-lec'h eo bet fregret toud ar
c'heuzioù. Rag bez a zo parresioù en
Breizh amañ lech eoc bet fregret toud an
traou, ha bremañ eme evel ur Siberi.

F.K. — Ya, barzh Poullouen hag
anezhañ Plougonver 'n eus bet klevet zo
bet gret ivez. Ha kalz bremañ a lavar
fregañ ar gizeher toud n'eo ket mad d'ober.
Swid pezh a sell al loened, mar kares
bremañ emaint e-maes nos-deiz, memes
e-pad ar goazh. Gant an avel hag ar glaw
warne e vevont o klask ar gwasked. Setu,
en ur mod, n'eo ket ken mad-se, a gav din.

P.V. — Ha petra a soñj gwreg an
Aotrou Maer eus stad ar vro ?

GWREG an Aotrou Maer — Re
start eo bremañ war ar maes. Re a labour
d'ober. Red eo mont e-barzh ar park, red
bezañ en ti, red eo tapoud partout. Red
start eo hon buhez.

P.V. — Ha gwechall, daoust hag-efi
'oa memestra ?

GWREG an Ao. Maer — Oa ket, ma
Doue ! Muioc'h a dud eo gwechall ewid zo
bremañ war ar maes.

P.V. — Ha perag zo bet cheñchamant

GWREG an Ao. Maer — Peogwir
n'eus ket kement a dud ken, ousoc'h
awalc'h. Ha startoc'h eo deomp labourad
muioc'h. Ha n'omp ket kap da werzhañ hon
zraoù ken mad. Ha neuse an traktourien ha
toud an traoù-se a goust ker deomp ivez.

P.V. — Klevet e vez laret bremañ
penaos ar marc'had youank n'houl ket
chom war ar maes ken. Hag eo diaes d'ar
baotred neuse, kaoud unan da zimeziñ,
ewid chom e-barzh ar gêr. Ha neuse ec'h
sonj toud da Bars ha lech all. Petra
soñj deus se ?

GWREG an Ao. Maer — Peogwir a
gav deze a vo brawoc'h e-lec'h all. Ha
martese vo ket ivez.

P.V. — Ped eured zo bet ar bloaz-mañ
e Plougras ?

GWREG an Ao. Maer — Pemp
eured.

P.V. — Ha ped interamant zo bet ?

GWREG an Ao. Maer — Eizh pe
naw, ha peder badizant. Se ne ra ket ar
gant.

P.V. — Neuse ec'h a ar boblañs war
zigreskiñ ordin ?

Y. GWASDOUE — Ya. Hag e-barzh
ar bloaz-vechou da zont e timinou muioc'h,
rag bremañ eme al lodenn vras eus ar re
youank o vont da zeskiñ micherioù newez
hag ar re-se na deont ket ken da Blougras
na lech all dre amañ peogwir na gavfont
ket labour. Setu e talc'hfont da vont kuit.

Komzoù dastumet gant
D. Graudon ha Loig Kerवास



«Nann da Europa an treustoù !
Ya da Europa sossialist ar pobloù.»

Setu ar pezh a embanne UDB da vare
ar referendum savet gant Pompidou, pa oa
hemañ o c'houlenn digant ar Frañsisien
hag-efi «o an dra vad, pe ne oa ket,
degemer Breizh-Veur e-barzh ar Marc'had
Boutin. Ha bremañ eme Bro-Spagn o klask
mont e-barzh d'he zro... N'eus ket gwall
bell zo e oa frank-a-walc'h al Ledenes
Iberika ewid kapitalistad Spagn Goch, med
tamm-ha-tamm, ar re-mañ ez eus deuet
c'hoant dehe c'hoari gant o gwennien war
un dachenn vrasoc'h. Hag e teu neuse da
vezañ stankoc'h-stankañ an darepredoù
etre pennoù bras Spagn ha re ar Stadoù all
(kapitalist) eus Europa.

Setu perag ive ez eo red da
Vro-Spagn, goude ren spontus Franco, bet
gwasket ar Spagnoleid gantañ e-pad 40
vloaz, pe dost, ez eo red dehi ober van da
vezañ ur vro demokrat, digor, liberal en ur
ger. An eo Franco d'an douar, hag ez eo
bet kemeret e-bias gant ar roue Juan
Carlos : ha mar eo ar frankiam war un dro
gant Franco ? N'eo ket sur tamm ebet.
Resort frankisoù politikel zo bet roet d'ar
sindikadoù, da stroladoù politikel an tu
kleiz, d'ar pobloù gwasket, Euskadi,
Katalunia, Galisia ? Nebeud, nebeud a dra.
Bisaj liberala Spagn Newez n'eo nemed ur
mask ! embannet en neus Juan Carlos da
skwer e vefe sellet diwar-vremañ ouzh an
oil vevhoù komzat war douar Spagn evel
tra broadel ar stad spagnieg. Braw-tre, med
a-hand-all ez eo bet kresket niver ar
bolserien, hag e talc'h da stardañ ar
wif, evel ma vefe gret e amzer Franco :
n'eus ket roet frankis politikel ebet d'ar
pobloù sujet, na d'ar brisonidi politikel.
Evel-just, n'eo ket ken rust an doareoù mui,
red eo da Spagn ober van da vezañ ur vro
demokrat, sevennet, arsa, fichet kêr ha
kran, par d'ur plac'h newez, ewid bezañ
degemeret e-barzh ar Marc'had Boutin...

Da c'hortos, e talc'h ar pobloù sujet da
vezañ gwasket. Ha pa vo aet Spagn
e-barzh Europa an treustoù, o vint gret
kenned-all, pe martese e vo gwahoc'h an
traou, war an dachenn ekonomikel d'an
nebeutañ. Bez e vo un ahel o vont eus
Madrid ha Barcelona da Paris, Lyon,

Milano, ha pelloc'h tremas ar Ruhr ha
Bro-Holland ; ahel Europa binwidig 'vo
hemezh. Gwazh-a-se ewid ar broioù pell
diouz an ahel-se, evel Galisia da skwer.
Ewid Katalunia, ur vro ec'hon, enni 7 milion
a dud, ne vo ket ken gwazh an traoù
martese, dre ma z eo un eus ar broioù aet ar
pellañ enne an ipernezhezh (industrialisation),
e Spagn a-bezh. Med dre ma n'ema ket ar
galloud ekonomikel etre doareoù al labour-
erien ano, ne vo ket muioc'h ar galloud
politikel gante, ma ne vez ket kerneret an
hent mad, an heni a gass d'ar sossialism.
Kalz toostoc'h eme stad Bro-C'hallisezh ouzh
heni Vreizh : an divaez eus an darepredoù
ekonomikel stank eme an div vro, hag
abaoe pell zo zo krogret Bretoned ha
Gallesaned da zivrañ...

Gant daou zen, diou stourmer politi-
kel, ur Gallesian hag ur C'hatalunad, eo bet
laket kement-mañ splann war well d'an
dud, bodet gant UDB newez zo : paeur
meeting zo bet gret, en Naoned, en
Orant, e Konk-Kernew hag e Brest. Bez ez
eus bet ouzhpenn kant a dud ouzh o selloù
bevech. Displeget o deus fraezh pere 'oa
kudennoù o div vro, ma z eo o Galisia
drest-oil gwall dost-ker d'hon heni. Hag un
dra zo ez eo arabad ankouadet diwar-benn
liberalidat Juan Carlos : chom a ra tud
e-leizh e-barzh prisionioù Bro-Spagn, ha
drest-oil prisionidi politikel. Ar re a zo bet
didoullbac'het ne oant nemed laeron
vuud, kambrolerien dister : ned a ket
aliberadec'h ar roue betek roññ o frankis
d'ar stourmerien politikel. Hag ouzhpenn e
prisionioù Spagn n'eus nemed ur rejim, heni
ar gwir boutin (droit commun), rejim
politikel ebet. Dre vras ez eus ewel-se tost
da zour c'hant stourmer politikel an toull
ken eus Galisia, ken eus Katalunia,
paotred UPG (Unio do Povo Galego) pe
eus ar PSAN (Partied an Tu Kleiz e-touesk
brogourien Katalunia). Red eo d'o
familoù bewañ koulskoude, ha setu perag
ez eus bet gret ur ket da gelver ar paeur
meeting bet dalc'het newez 'zo. Rag hor
pobloù gwasket a gerzh dom ha dom ; pa
vo aessat da unan, e vo aessat d'ar re all
ive : ya kerzhet a raont dom ha dom tremas
ar frankis hag ar sossialism.

SADORN 21 A VIS C'HWEVRER
Sal «Le Stella»
brest-LAMBEZELLE
FEST-NOS

GANT

Kanerien Brasparz
Monnat ha Peron
Bleizh Ruz



Stajoù brezhoneg er bloavezh 1976 (S.A.E. ha B.Y.V.)

EHANSKOL BASK

BRO LEON (B.Y.V.) : S'zhunvezh kentañ, staj diwyezh e Plouarzel
Eil s'zhunvezh : ur staj hollvrezhoneg e Landivisio e kenlabour gant Emgleo Bro Leon (Kendalc'h) a zo da bal dezhañ kass endro ur s'zhunvezh ar vrezhonegerien e Bro Landi ha studiañ kudenit ar stourm lec'hiet.

BRO WENED (S.A.E.) : Ur staj hollvrezhoneg e Kistiriq ewid ar re a fell dezho studiañ gwenedeg.

BRO DREGER (S.A.E.) : Ur staj a-bep-seurt liveoù e Boulvriag.

BRO GERNE (S.A.E.) : Ur staj labour

ewid brezhonegerien e Bro Vigoudenn sevel Oaled sevenadurel ar Vro Vigoudenn e Plouneour. Ur staj a-beb-seurt liveoù e Pont n'Abad.

HANV

Kampoù harfugale a vo asaset e Bro Dreger gant B.Y.V., eus kreiz mis Gouere da fin mis Eost. Daou anezho o padout teir s'zhunvezh. Unan ewid ar vugale a gomz brezhoneg dija, eglie diwyezh, ewid ar re a gompen pe e klaso a zud deskñ dezho (bugale beteg pewarteg oad). Dindan paeroniezh U.F.D.L.E.A.

FIN MIS GOUIERE

E Bro Dreger ur staj diwyezh hag ur staj hollvrezhoneg gant B.Y.V.



MIS EOST

Ur staj e Plovelh (Bro Gemper) gant S.A.E. ewid ar re o deus studiet ingal abaoe bloaz, er pemzekte kentañ.

Ur staj denaouerien hag ur staj diwyezh e Bro Leon, gant B.Y.V. en eil bemzekte.

Daou staj diwyezh e Rostren (Kerne Uhel) hag e Rieg (Kerne Izel), hag e Poullouen ur staj, labour darn ha kan ha diskan ewid brezhonegerien.

O 21 gant B.Y.V.

Daou staj war ar maes gant B.Y.V. e Bro Kastell Paol er pemzekte kentañ hag e Bro Lesneven an eil.

DERO MIS GWENGOLO

Daou staj war ar maes :
- E Bro Dreger (Plouared) gant SAE
- E Bro Leon (Lokourann) gant BYV
Ur s'zhunvezh e-pad ar stajoù peurlies.

sañ, nemed war ar maes ha heni Plovelh. Etre 25 ha 30 lur e koust an dewezh dre vras enno. Ar stajoù diwyezh a zo graet ewid tud o studiañ dija abaoe ur pennadig. Estreged kentelioù yezh e vez sonerezh ha kalc'hioù studi hag er stajoù hollvrezhoneg e vez stalioù labour a bep-seurt hag e brezhoneg penn-da-benn.

Kemerit perzh hoc'h-unan ha grit bruderezh. Ewid itouaroù skrivit en ur lakaad un timbr ewid kement goulen.

Ewid S.A.E. :
Bernes ROUZ - Ar Velenn - An Erge Vras
29000 KEMPER

Ewid B.Y.V. :
Ao. F. OLLIVIER - Glasvezenn - Al Lividig
29238 BRIGNOGAN

Karta



- U.D.B. zo ur strollad ennañ ar Vretoned hag ar re a gar Breizh, an oll o c'housod ez eo galwet Breizh ur vroad hag anad deha ez eo red degas ar sokialouriezh e-barzh o bro. War stourm ar renkadoù eo diasezet hoc'h ober.

- U.D.B. a stourm ewid sonañ ur renad demokratel-rik ma vo ar Galloud gant renkadoù al labourerien.

- U.D.B. a stourm ewid diwall ha diorren personiezh pobl Vreizh, war an tachennoù ekonomikel, kevredigezhel, ha, gant-se, politikel.

- U.D.B. a embann ez eo red diskar ar gopitalouriezh ; stourm a ra ewid ma vo perc'hennet a-stroll gant an oll labourerien ar binvioù-krouñ hag ar binvioù-ingsañ.

- U.D.B. a embann ez eo red koadur ur raktresadur sokialour eus an ekonomiezh, ewid mad al labourerien, gant kontroll ha divis demokratel.

- U.D.B. a embann n'heller e sturim ebed ober heb ar sindikadoù dre zileudi, ewid difenn mad al labourerien.

- U.D.B. a embann ez eo unan eus diasezoù-red ur Vreizh sokialour lakaad en e blom ur gwir sevenadur pobl.

- U.D.B. a embann ez eo red ober stad eus ar c'hredennou filosofel ha relijiel er stourm sokialour.

- U.D.B. a sav a-eneb krenn da beb gwalleri-mab-den, a sort gant ar faskouriezh, ar ouennerezh, an olivelouriezh.

- U.D.B. a sav a-du gant ar frammañ sokialour eus oll bobloù Europa, gant kevatalded, respet hag anaoudegezh an eil d'egile.

- U.D.B. zo stag a-grenn ouzh pennoù an etrevroadel proletar hag ouzh gwir ar bobloù d'ober gante o-unan ar pezh a garont.

- U.D.B. a embann ma'z eo d'ar soudarderezh, a laka da red an disarmanñ olleg.

- U.D.B. a kengred ma'z eo gant kement pobl gwasket 'zo, a sav' eneb d'an impalaerouriezh kirieg d'o arallekadur ekonomikel, kevredigezhel, sevenadurel ha politikel.

NOTENNOU

broad : nation
sokialouriezh : doctrine socialiste
stourm ar renkadoù : lutte des classes
renad : régime
dioren : développer
kevredigezhel : social
kapitalouriezh : capitalisme
raktresadur : planification
sevenadurezh : culture
faskouriezh : fascisme
gouennelouriezh : racisme
olivelouriezh : totalitarisme
kevatalded : égalité
pennoù : principes
impalaerouriezh : impérialisme
arallekadur : aliénation

SKOAZELLIT POBL VREIZH

Skoazellit Pobl Vreizh hag a zifenn, an hor yezh, Breizh al labourerien, an ur gas ha profoù da e Pobl Vreizh K.R.P. 2746-79 Roazhon.

DA GENLABOURERION POBL VREIZH
Skrivañ ho pennoù war un tu hebken d'ar paper :
Lakaad an hanvioù tud ha broioù e pennlizherannoù ;
Niverennoù ar pajennoù.
TRUGAREZ !
(Notenn ar moulezezh).

PAPERENN EMESELAÑ
HANV
HANV SADEZ
CHOMLEC'H
e c'houlenn diorren da vezhañ eus U.D.B.
Eost
Siz
Da gas an dro (lakaad ha pe adskrivet) da U.D.B. - B.P. 304 3573 BREST CEDEX.



Beb daou viz lennit :
AL LIAMM
(saver e 1945)
ar gelaouenn nemet o reif.
c'hwec'h gwech ar bloaz, barzhonegoù, kontadennoù, pennoù a beb-seurt ha keleier.
80 pajenn e peb niverenn.
Rener : Ronan Huon.
Koumanant : 30 lur. Studierion : 25 lur.
Mme S. Chereil, 100 bd de Verdun Rennes C.C.P. 2184-34 Rennes.

KOUMANANTIT DA LE PEUPLE BRETON
B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX
HANV
HANV SADEZ
CHOMLEC'H
a gas e goumanant bouez : 25 lur⁽¹⁾
skrivet : 30 lur⁽¹⁾
skrivet : 30 lur⁽¹⁾
Armet an arz-hall dre cheñch-bod⁽¹⁾
maroc'hañ⁽¹⁾
cheñch-bod⁽¹⁾
⁽¹⁾ Diwelet ar gantoù na servitont ket.
C.C.P. RENNES 2365-76.

'N'eo ket gant ar re a lavar e karont ar brezhoneg e vo saveteet hor yezh, met gant niver ar re her c'homz a- ratozh-kaer, gant niver ar re hen desk d'o bugale.
Loeiz Herrieu.

Stourm evit e labour, stourm evit e vro Ret eo ober an daou war un dro !

Fae ganin war ar brezhoneg ! eme bepred ar genaoueg.



WANI ha WENIG
KELAOUENN DAOUVIZIEG
EVID AR VUGALE
A RA
UR FEST-NOZ
e
KASTELL-PAOL
Koc'hu
an Amann
d'ar sadorn
21 a viz
c'hwervr

'Mestroniezh politikel Bro-C'hall he deus graet eus ar bobl vreizhat ur bobl a vevelen, he mestroniezh yezhel he deus graet diouti ur bobl a sklaved.
Yann Sobier.



ALE MAB-GAST! NEM
ZIVEM UN TAMM! LAK AR
BLUNENN WAR DA BENN, MA
PEUS UNAN, HA N'ANKOUES IRET
N'EMA KET DA BLESS
MED AMAN!



SOD MAD EO-EN!
PETRA 'MAON 'VONT DOBER
GANT AR BLUNENN-SE? NE
N'ON KET UN "INDIEN"!!!
JONS EMA-EN BA UR ZOO
BENNAG!



DIHAN DA
RIDTAL, HA KERZA
FOUNNUSSOCH 'VID AN
DRA-SE DA WELED AN
HENI GOZH DU-SE, DA
BAP UR FOTO DIT
ALVAON!

PEO GWIR
N'EUS KET
MANN DA
LARED GAR
SORT TOURTE!



PEMENT UN AER
GRAN HA DISKOJECIT
DA UR PADR JEBER
HEM'ZO UR BRETON KOKH,
DEUS AR RE VEZ KET
KALZ KEN! UN
"APPACHE"
PUR-SANG!



OBER FENT GANIN-NE,
MAB-GAST FRI-BRAS! KAER
'A-EUS BET LARED DEHAN GAR
VRETONED N'EUS KET PLUNY WAR
O ZOK... HA N'ON KET UN INDIAN
'VELKENT HA 'VELKENT... ME ZO
BAR GER AMAN, N'ON KET? HAD
UR BLUNENN ZO MAD DA
SKRIVAN, AN DRA-
SE EO-TOUD!



FIDAZOJE! BED
NEU-INT BET ALHANON,
MED AR BLUNENN-SE
'C'HALLO SERVIJAN
DA SKRIVAN BEPRED.
ME ZO 'VONT DA
LARED MA JONS!



TRESSET GANT NOND,
KOMZOU GANT SKOLIDI
LISSE KARAES